



TRAHISON AMOUROUSTET. 1093

DEDIET DA UR GODISSEREZ.

Var an ton ancien.



MA vizen bet partajet demeus an eloqanc
A bossede Appolon gant calz eus a brudanc,
M'em bize grêt ur reglen merget gant va daelou ;
Demeus ar guel blaneden a brezid d'am deyou.

Bremâ so'n nebeut amzer e voan bet ravisset
Gant charmoù ur femelen, rouanez ar guenet ;
Dre artificiou Venus, rouanes ar yaouanqis ,
Ez ê deut d'am punissa deus ar brassa suppliç.

Goneet e voa va c'halon gant an amouroustet ;
Gant ar c'hrea chadennou e voan prest sesisset ,
Nos ha de er suppliçou , er brassa tourmanchou ,
Devoret ha consumet gant ardeur ar flammou.

Scuis o veza tourmantet , hep cavet esperanc
Da veza prest delivret dre ar reconnessanç
Demeus an objet charmant a rê va suppliçou ,
A voa capabl e-unan da cessi va foanniou.

Ec'h annoncis hep dale ardeur va fassion
D'an objet eus va hirvoud va inclination ,
Gant un esperanc parfet da yea recompanset ,

Erve justic ha merit eun amitie parset.

Goude bea saludet he grac hac he fresanç
 Sincer emeus invoget enor he odianç
 Da avoui en he fresanç va oll santimanchou ,
 Carante , fidelite betec fin va deyou.

Assuret emeus dezi gant protestation
 E halume ar flâmou demeus va fassion ,
 E possede en antier va halon evit tron ,
 Hac e rê va oll vartir ebars en he frison.

De bonjour dêc'h Rouanez demeus an oll charmou ,
 C'houi a deu da imposi dre bêvar c'horn ar vro ;
 Dre oll o heus ar ponvoar var an oll galonou ,
 Evel an amouroustet , an oat hac an armou .

Ha dêc'h ive , va douciq , eus a greis va halon
 Me souhet sur an enor e vec'h va guir mignon ;
 Ha mar grit din an enor demeus ho amitie ,
 E ramplissot va c'halon a joa ha levene.

Hennes a so eun enor a na veritan qet ,
 Meritout an eloqanç demeus o hol speret :
 Ar melodi zo gleet da oteur an natur ,
 A bossed an oll pouvoar , nonpas d'e grouadur.

Mignones , credit parfet oc'h eus-an meritet ,
 Mar en merit birviqen objet ebars er bed ;
 Ha mar bec'h din quer fidel evel ma tesiran ,
 C'houi ê va oll desirou certen bars er bed-man.

En faç an ên , an douar , va mignon , e roan dêc'h
 Va fe , va guir a enor da veza fidel dêc'h ;
 Ha mar deuan da vancout qeit a ma vin er bed ,
 Ne c'houlennan arruout james er joaustet.

Me ra demeus va c'hoste , va douç , ar memes le ,
 Da gonserv va amitie bete disqen er be ,
 Ha memes da gcontracti dre an douç alianç ,
 Contrat a fidelite , ha re ar jouissanç .

Me ho ped , calon dener , da viret ar prudanç ,
 A so un arm necesser da zifen ar gonstanç :
 Qemerit an oll armou enep ar guel deodou ,
 Rac ne veac'h reduiset dre o artificou .

Poent ê enem separi , rac tad ar sclérijen
 A ya da vea ramplæet gant an devaligen :
 Me a gare , evit merq demeus va amitie ,
 Cavet pouvoar Josue evit asten an de .

Ar c'himiad so ractal grêt tre an daou zen fidel ,
 Ogmanti a ra o foan ous en em dilezel ;
 Evit en em soulaji , on eus an esperanç
 D'en em gavet hep dale evit hor passetanç .

Bonsoar , mignones fidel , eus a greis va c'halon ;
 C'houi a ra va flijadur ; va c'honsolation :
 Ha dêc'h ive , va mignon , retornit bep dale ,
 Ar mennat a c'houlennan , ma vo var ben eis de .

Bonjour dêc'h , va douçiq qer , rouanes va c'halon ,
 O quittat zo evidon ur guir bunitiōn ;
 Mes bremàn ec'h esperanç , dre nerz ho carante ,
 Na yezo qet differet chaden va amitie .

Selaouit va moez truezus o c'houl oc'h odianç ,
 Gant ur guir humilite ebars en ho presanç ;
 Evel ur c'haptif fatiq , e creis e chadennou ,
 A implor a vir galon finissa e boanniou .

Demeus va c'haptivite accordit din va graç :

Evit gallout contempli plijadur ar Parnas :
Va c'hrim a so pardonabl , ebars en pêh fêçon ,
Pa zê guir ê evit caret emeus bet ur galon.

Va mignon , ret ê avouï , bras ê ar chanchamant
A so deut boe'n amzer-se ebars em santimant ;
Tremenet ê an amzer demeus hoc'h odianç ,
En em distag rân ouzoc'h , honnes ê ho setanç.

N'em bize biqen sonjet ebars en dromplexon ,
Nac e vizac'h bet capabl demeus a drahison ,
Qementse a rent va loan er bed-mâ hep remet ;
Mes ma cléfen ar sujet e ven c'hoas soulajet.

Gallout a ellàn credi n'en don bet condaonet
Gant rouanez ar furnes hep cavet ur sujet ;
Ha mar dê guir qementse e credàñ gant rêsôñ
E vezò sur va suppliç hep nep remission.

Va escusît , den yaouanq ; bep sujet na rêsôñ
Ê prononcez an arrêt eus hon separation ,
Dre effet ar c'hapriçou deus an astr dominant ,
Pini ra impression var va zamperamant.

Mes al lezen a zisq demp , ha ret eo be c'hredi ,
Qent eguet ober vœuyou dont d'en em gonsulti ,
E tleer en em sonjal qent eguet prometti ,
Rac ur veach promettet , ret ê effectui.

O Venus ! Douees payan , cruella recompanç ,
Goude da vea credet , va ficat gant da lanç ;
O veza dide fidel pebes plijadur zo ,
Mes mar cesser da garet , eo guell beza maro.

Oll Doueou ar Parnas a so oll insultet :
An ên couls hac an douar a so oll affrontet :

Certen hennes so eur c'hrim hac a so punissabl,
Ma na ve prest effacet pa eo c'hoas reparabl.

Jupiter , puissant Roue eus an oll Doueou ,
Enem venj eus ar c'hrim-man erve da boueriou.
Ha te , Mars victorius , qemer da oll armou ,
Evit cavet ar rēson eus e fromesseou.


Mercur , ambassadeur , digor da ziousquel ,
Nij bete ti va mestres , ha ro dei ar bresel ;
Dre eloqanç Apollon obten din ya mennat ,
Da aretti an daerou a so em daoulagad.

Ciceron , prinç ar furnes , gra dezi gourhemen
Da guitat ar gaouchoni ha da heuill al lesen ,
Gra dezi efectui gant justic e veuyou ,
Ma teuyo d'am delivra demeus he chadennou.

Junon , mam an eureujou , gone din ar victoar ,
Hac a devo melodi ha triomf an Nao Hoar ,
Ma vo celebret ar goel var mene ar Parnas ,
Eu enor d'am Mestrezic , pa vin antreet en grāc.

F I N.





CHANSON

AR GUIN-ARDANT, PE AR JIGODEN.

Var ton ar Gazes.

Me ho suppli, tud yaouanq, haec ar re gos ive,
Deut da glêvet ur chanson composest a nêve,
Zo grêt var ar Guin-Ardant, a hanver Lodevi ;
Calz plijadur ho pezo, mar gallit e disqi.

Laqet emeus em membror hac ive em speret ,
Da zonet da zisclêrya etoues ar Vretonet .
Var sujet ar malheuriou a so bet aruet
E Breiz-Izel, bars er bla mil eiz cant ha nontec.

Estoni ra va speret o tont da gontempli
O c'hout penos e c'hoariac'h partout ho tragedi ;
O velet cals a dud fur penos e voant chanchet ,
Goaset, merc'het, tud yaouanq, graguez, intanvezet.

Ambandonet o poa tout tres an opinion ,
N'o poa mui a garantez nemet vit ar boesson ;
Choaset o poa'r Guin-Ardant evit ho quir mignon ,
Hac ec'h evec'h Jigoden ep moderation.

Goude e visac'h guelet o rullya dre'r vouullen ,
Guerzet gauêc'h ho potou , ho toq divar ho pen ,
Difreset ho chupennou ha-collet oc'h arc'hant ,
Alies coussqet crmes ho tud e nec'hamant.

Hep cavet intantion da choqi d'en ebet,
 Lézomp bremâ ar voaset, comzomp eus ar merc'het;
 En escotti a Dreguer e voint oll jentilet,
 Deut da veza gracius en andret ar voaset.

Ne neus qet c'hoas pell amzer, ententit, Bretonet,
 N'alle qet an dud yaouanq parlant eus ar merc'het;
 Pa deuas ar Guin-Ardant marc'hat mat er c'hontre,
 Deweus ar merc'het yaouanq eus grêt cals a c'brague.

Merc'het yaouanq ha re gos, plac'het a dies mat,
 Pa c'hent d'ar foar da verza p'otramant d'ar marc'hat,
 Ne voa marc'hadour ebet capabl da accordi,
 Ma na vize prometet eur bannac'h Lodevi.

Mont a ra'r varc'hadourien neuze a galon vat
 Da bêa ar Guin-Ardant, da ober ar marc'hat;
 Dre voyen an Odevi e zint bet accordet :
 Gonit a re'r marc'hadour ouspen penipzec guennec.

Po deus touchet o arc'hant eo contant o speret,
 Ha goude o banahou o deveus c'hoas sec'het.
 Hac hint mont teir pe beder da di ar Guin-Ardant,
 Ha goulen peb a vanne neuze presantamant.

Evet o deveus eno ar peder femelen
 Qement eus a Vouin-Ardant ma savas en o fen ;
 Mes pa voe ret sortial er vouillyen int rullyet
 Hac abimet o dillat, goapêt gant ar merc'het.

Rullya dirullya rejont o feder er vouillyen,
 Ha pa fote dê sevel e queent var o fen :
 Un eston int da velet ar merc'het diguempen,
 Ha collet o mouchoner, o c'hoef divar o fen.

Comprenit an oll domach a ra ar Guin-Ardant

D'ar re a ef aneàñ da goll o zantimant !
 En em expos d'an danger evit coll o buc,
 Evel a so bet guelet partout dre ar c'hontre.

Pa deunas ar Guin-Ardant da guenta er vro-màn,
 Voa vit an hospitaliou da bansi an dud clàñ ;
 Ha gouscoude calz a dud en em dol d'en eva ,
 Hac en certen eur boesson eus ar re gruella.

Hac evize bet eur mor formet a Vin-Ardant ,
 E vize bet bet disehet ebars ar bla presant ;
 Ar pes a so cos ma zê querêt evit ar bla ,
 Dre ar gonsomation a so grêt anea.

Qement tra so er bed-mâ a eprouv chenchamant :
 Hiryo leromp Jigoden ha guechal Guin-Ardant ,
 Ur bane ini brutal , ur C'hranc pe Mistigri ,
 La Gout , eme Yan-Zoudard , ha ni lar Lodevi.

Poent e cavàn finissa , amplic emeus comizet ;
 Ne larin mui davantach , gant aon na vec'h fachet :
 Lavaret emeus dêc'h darn eus ho quirioneou ,
 Ha gouscoude ya-unan me meus ya defotjou.

F I N.



E Montroulez , e ty LÉDAN , e traon ru ar Vur.